

1- Trifin hag ar gêr vras

Harpet eo korf askornek Trifin ouzh riblenn ar prenestr bras er sal degemer, e ranndi Lucio, e pevare solieradur un adeiladur nevez flamm, pintet e laez ar menez a valir a-us da gK.

Analañ a ra ar vaouez, lontek, pep elfenn eus an arvest dispaket dirak he selloù : tier, en dremmwel, urzhiet fur ha heneuz, a-stok an eil re ouzh ar re all, a-renkadoù an eil re war-lerc'h ar re all, a-zehoù, a-gleiz, ouzh krap ar brioù goloet a wez, a-hed ar stêr, livenn-gein sioul ha hebleg ar gêr, kuilhet e kleuz an draoñienn. A-boan ma verzer, ur wech dre vare, doare ur fiñvadenn amañ hag a-hont, ha c'hoazh... Nijadenn ur vran pe ur gouelan o tresañ o hent dre an oabl glas, luc'hadenn drumm ur bann-heol war wer pe vetal ; un dakenn liv o tont war-wel, a-boan klevet hag o steuziañ du-hont er pellder, an holl diheverz, par d'ar c'hrenadennoù berr a oar hejañ blev ul loen moredet da heul e hunvreoù.

O kousket e vefe al loen ? Se a c'hellfe unan dic'houzvez krediñ marteze, met kalon Trifin a dalm

en he bruched treut, sevel a ra ruz ar gwad d'he divjod diliv, rak gouzout a ra, hi, ha war-hed he holl skiantoù emañ an degouezh dirazi : krozal a ra ar gêr vras, kluchet du-se en draoñienn ledan ; diframmet eo an trouzioù, kemmesket gant un heklev a zasson eus a-bell. Seizet e chom Trifin, boemet gant an trevell ramzel dispaket dirazi. Sevel a ra c'hwezh iskis an tireoul tomm betek he fronelloù c'hoantek, diforc'hañ a ra he divskouarn, a-douez fraoñvadeg ar c'hirri, kri skiltr ur bugel, pe c'hoarzh hoalus ur vaouez e-kreiz an tousmac'h, harzhadenn drumm ur c'hi, ha tostoc'h souden kan ul labous. Krozal a ra ar gêr vras dirazi ; du-hont en draoñienn emañ ar bed, du-hont ar vuhez, ken tost ha ken pell war un dro ; en em veskañ a ra daoulamm he c'halon gant kroz teñval ar gêr, ha tridal a ra he holl askre.

Krizañ a ra he malvennoù : un tu bennak war ribl ar stêr emañ tour an iliz-veur, ha war ar riblenn all war an tu dehoù, kazi war-hed dorn, emañ ar savadur a ra-hi anezhañ kalon ar gêr vras : an Opera.

N'o gwel ket anezhi, met gouzout a ra ez eus anezho e pep lec'h tro-dro, ar straedoù ledan hag ar gwenojennoù enk, pavezet, bevennet gant o savadurioù livus, anezho bouzelloù tomm ar gêr vras. Redek a ra drezo gwad ur vuhez he doa bet dindan diraez ur wech bennak, e oa kredet dezhi, d'an nebeutañ, ha daoust ma ne oa bet nemet un dazgwel hoalus, gouzout a oar-hi, gant he holl

skiantoù, ez eus ur vuhez all, disheñvel diouzh he hini ; o c'hortoz Lucio emañ, met Lucio n'en oar ket c'hoazh.

Kiger 'oa tad Trifin ; o vont hag o tont war ar maez, eus ur gêriadenn d'eben, e veze gant e garr, evit prenañ loened, a veze neuze astennet, pac'humet, e liorzh ar gigerezh : aze e choment, o daoulagad truezus paret war ar goullo, betek ma teue an tad da beurechuiñ anezho, o lakaat un termen d'o enkreiz ha da hini Trifin.

Marvet 'oa mamm ar plac'h en ur reiñ ar vuhez dezhi, ha kreskiñ a reas Trifin etre he zad-kozh hag he zad. Kaset e vefe bet an emzivadez da vatezh moarvat, un tu bennak e kêr ma vefe bet ret, met pinvidik a-walc'h e oa deut an daou waz da vezañ, dre labourat ingal ha dispign nebeut, ha spi o doa da welet anezhi dont da vezañ barrek a-walc'h evit bezañ lakaet a-dreñv ar c'hef er stal. Sentus 'oa bet Trifin a-viskoazh, ha plijadur a seblante kaout gant al labour ; deredek a rae d'ar gêr war-lerc'h ar skol, e-lec'h chom da straniñ dre straedoù ar vourc'h pe war ar reier en-dro d'ar porzh gant ar vugale all.

Ne vourre ket gant ar vugale all. “Trifin, fri pik, Trifin, fri hir” a raent outi. Ha gwir eo, ma oahi bet, ur wech bennak, ur babig ken koant hag unan all, ne oa ket bet gwall vrokus an natur ganti siwazh, tra ma kreske. Daoulagad pers teñval hag eztaolus a-walc'h a oa dezhi koulskoude, met re sko e oant an eil ouzh egile, ha p'en doa gounezet he

fri tachenn e-kreiz he bizaj treut, e oant sanket don en he foulloù-lagad ; ret e oa sellet pizh outi evit kejañ gant he selloù lemm. Ma vefe bet ur vamm garantezus oc’h ober war he zro, he defe gellet bezañ aliet diwar-benn an doare da lakaat da dalvezout an elfennoù plijus a c’haller kavout e n’eus forzh piv, met dilezet e oa bet ar plac’h penn-da-benn war an dachenn-se gant an daou waz a rae war he zro... A-walc’h e oa dezho ha dezhi, e vefe yac’h an holl, hag e vefe labour da zegas boued war an daol.

“Trifin, fri pik, Trifin, fri hir” a ouient huchal war he lerc’h ha c’hoarzhin a-bouez-penn a-dreñv he c’hein, endra ma kerzhe-hi a gammedoù hir, hep redek koulskoude, da gaout repu a-dreñv ar c’hef er gigerezh. A-dreñv ar c’hef e oa e savete. Ar vugale zoken, pa zegouezhe dezho ambroug o mamm betek ar stal, a seblante en un taol dinoaz ha doujus, pa zegemere-hi ar bilhedoù, bet pleget aketus gant o mammoù e chakod o doug-moneiz uzet, ha dispaket a-rekin war an daol-gont dirazi : ne douche ket ouzh ar bilhed, keit ha ma ne oa ket bet jedet, ha lakaet ganti war an daol, unan hag unan, ar pezhioù moneiz a yae d’ober ar restaol : gant he dorn dehoù e ouie astenn neuze davet ar vamm ar pakad gant an tamm kig moc’h pe bevin renket e-kichen ar valañs, endra ma rastelle he dorn kleiz treut ar bilhed, betek dezhañ kouezhañ er c’hef chomet digor. Neuze e vounte prim war diretenn ar c’hef, a yae en he flas gant son lirzhin ha

sklinton ur c'hloc'h o vrallañ. Sevel a rae he selloù da laez, gant mousc'hoarzh seven ur genwerzhourez arroutet : mousc'hoarzhin a rae ar vamm d'he zro, hag ar mab zoken a vousec'hoarzhe, evel teoget gant al lid o vont en-dro dirazañ : trumm e stoue neuze ar plac'h he sell war dremm ar bugel bourev, o stardañ he muzelloù strizh, yen he daoulagad, hag ar mousc'hoarzh a-boan stummet a skorne war dremm ar bugel.

« Trugarez, ha ken ar wech all neuze, » a lavare Trifin, seven, « kenavo » a responte ar vamm, hag ar bugel a sanke e benn en e chouk, lostek, mall warnañ bezañ aet diwar an treuzoù, o vennañ mare an dial : “Trifin fri hir, Trifin fri pik !”. Kresket e oa Trifin, kuitaet ar skol ganti da c'hwezek vloaz peogwir oa labour er stal, ha lesañvet e oa bet adalek neuze hervez he c'harg, Trifin-ar-C'higer.

2- Selina a-greiz P.

Ne oa liamm ebet etre Selina ha Trifin.

Ur gêriadez e oa eus Selina. He mamm, divroet da vare an dilabour bras war maezioù Breizh, he doa kavet fred, evel matezh e Versailles, e ti perukerien binvidik. Eno e oa bet ganet ar plac'h, ha broudet gant mistri he mamm, he doa desket fichañ blev ; hogen ne oa anv ebet eviti e tremenfe he buhez en un endro ma plave pounner skeudenn he mamm hag he zonkad reuzeudik ; soñjoù all a oa war he spered. D'ar gêrbenn e kase he hent. Donezonet-kaer e oa, ouzhpenn-se, leun a zeltu, ha kavet ur plas ganti evel perukerez-liverez en Opera e Pariz.

Treuzdouget e oa bet neuze en ur bed a lakae anezhi da grediñ e oa en em gavet souden e-kreiz unan eus ar c'hontadennoù marzhus bet lennet dezhi gant he mamm, pa oa bugel. Mont ha dont a rae en-dro dezhi priñsed ha priñsezed o saeoù seiz, dezho liv ar pevar amzer, liv an heol ha liv an oabl, loened hud, euzhviled ha krouadurioù espar, hag

ober a rae he seizh gwellañ evit klokaat braventez dibar an arvest, gant he ferukennoù hag he barroù-livañ.

Daoust d'ar gopr bezañ dister, bras e oa ar gou-nid : buan e teuas brud dezhi ha klask a veze war he lerc'h gant an arzourien vrudetañ : dañserien, kanerien, leurennerien. Fichañ a rae blev Salome, an Traviata, Mimi, Figaro ; troidellañ a rae en he fenn sonioù dibar klevet ganti du-mañ du-hont, eus ul logell d'eben. Pedet e veze da sellet ouzh an abadennoù kentañ ha pa strake an daouarn en-dro dezhi gant entan, e ouie e oa-hi unan eus an arzourien veulet.

Deut e oa da anavezout kement lec'h er gêrbenn, ma c'hwezhe spered ar c'hrouiñ. E pep lec'h e kave danvez da vagañ hec'h awen : ar blev etre he daouarn a oa evel liv d'al livour, gwer, metal ha maen d'an adeiladour, kan al laboused d'ar son-aozour... Mont ha dont a rae dre straedoù kozh leun a vuhez, war ar boulouardoù ledan ha trouzus, e liorzhoù kaer ar gêr-gapital, hag e pep lec'h en em gave en he bleud. War forzh pe du e kase he selloù, e pep lec'h e anaveze liv awen speredoù donezonet war stumm dibar ar bed en-dro dezhi.

Er gêr e oa e-kreiz Pariz. Pariz a oa he c'hêr.

Hogen, ur vaouez kenedus a oa anezhi, tener ha fizius he c'halon. Ha leun a demptadurioù a bep seurt a oa er bed en-dro dezhi. Gant al lusk a

lakae en he holl oberennoù e tañvae ar plijadurioù kinniget dezhi. Nebeut a amzer he doa evit ur gwir garantez, rak d'he micher e oa gouestlet he buhez.

Neoazh, ha hi deut dibistik d'he zregont vloaz, dievezh e tegouezhas dezhi bezañ, hag o tougen, pa ne oa plas ebet evit ur bugel, nag evit ur gwaz kennebeut, en he buhez. Diforc'hañ a reas. Hogen, en un doare dic'hortoz eviti, e voe aloubet he spered neuze gant un dristidigezh ne denne ket dezhi, ha ne glote tamm ebet gant ar perzhioù ret evit seveniñ he c'harg. Poent bras e voe dezhi ober un ehan ha tec'hel, amzer dezhi da brederiañ ha da zont en dro enni hec'h-unan.

N'anaveze ket bro he hendadoù, ha kentañ tra a zeuas war he spered a voe anv ar gêriadenn m'o doa bevet he zud-kozh. Sant-P., ur porzh-mor bihan un tu bennak e penn ar bed.

3- Trifin ha Selina

Evel-se en em gavas ur vaouez, e dibenn ur mintinvezh a viz Meurzh, e toull dor ar stal-gigerezh e Sant-P. Brall ar c'hloc'hig a-us an nor a lakaas Trifin-ar-C'higer da sevel he daoulagad diwar ar c'hontoù, hag ar pezh a eztaolas he dremm a zlee bezañ digomprenus d'ar vaouez koant a-dal dezhi, rak dirollañ a reas homañ da c'hoarzhin, he c'hoarzh sklinton o tasseniñ dre ar stal evel degaset gant bannheol an nevezamzer hag en doa kavet e hent etre ar rideozioù betek an daol-gont dirak Trifin.

— Demat, ho spontet am eus, digarezit...

Hogen Trifin e oa dezhi evel pa vefe bet komzet saozneg outi ken strafuilhet e oa : ar veleganez kran ha kenedus dirazi ne glote ket gant he bed, ur weledigezh e tlee bezañ, ha ne zeue ger ebet evit respont d'ar seurt boudig-se...

— Feurmet em eus ur gambr e ti un aotrou... Bizien, ha hervez ar pezh a zo bet skrivet din gant an ajañs, an alc'hwez a zo da gemer e ti Lu Pochig : Lu Pochig, kiger am eus lennet war ar barr-ti...

Distroet e oa Trifin enni hec'h-unan :

— Degouezhet mat oc'h, demat deoc'h. Emaon o vont da gerc'hat an alc'hwez, a zo a-dreñv, er gegin...

— Gallout a rafec'h ambroug ac'hanon betek eno ? a ouzhpennas ar vaouez, tra ma haste Trifin d'ar gegin. Kuitaet em eus Pariz ar mintin-mañ abred gant ma malizenn, ha mall zo warnon mont da ziskuizhañ un tammig...

— Tad, a huchas ar gigerez, Tad, deut eo ar feurmerez, evit ti Bizien ! Mont a ran da ziskouez dezhi pelec'h emañ. Taol ur sell war ar c'hef e-pad an amzer-se mar plij...

Distreiñ a reas Trifin eus ar gegin, ur c'holoenn rouz en he daouarn.

— Evit an Itron Selina Kernalleg : c'hwi eo neuze, a lavaras Trifin, en ur sevel ur sell lent davet ar vaouez.

— Ya, me eo, c'hoant 'peus da welet ma c'har-tenn-anv ?

— N'eo ket dav, ne 'z afec'h ket kuit gant ti Bizien, neketa ? a respontas Trifin gant daoulagad bouilh, souezhet hec'h-unan gant he respont herr.

E-lec'h eilgeriañ, e sellas Selina pishoc'h outi :

— Ma, ho taoulagad o deus ul liv dibar, met se a ouzit moarvat ? Sellit, dres liv ar maen war ma gwalenn : ur maen pers eo.

Sevel a reas biz-gwalenn he dorn dehoù, o lakaat war-wel ur walenn eus ar re gaerañ, rikamanet gant